

# MA BRO

---

Da Gab Liskildry.

« Breizad ec'li on 'vel ma zado,  
Evelte 'fell d'in-me,  
Karout ma feiz, ma yez, ma bro,  
Savetei ma ine ! »

« Me gar ma Breiz hag he c'hoajou  
Sioul ha dudius,  
He lanneier, he feunteunioù  
A hirvoud truezus ! »

« Me gar ma Breiz hag he rec'hel  
Krinet ha touskanet,  
Seblantout a reont mervel,  
Lazet g'and ar c'hlenved. »

« Lar d'in ma Breiz 'n hano Doue,  
Lar d'in hep kavout mez,  
Mar n'eo ket hennez da doare,  
Kouls ha hini da yez ?... »

« O nan ma Breiz, ma bro garet,  
Na hellez ket mervel,  
Keit ha ma chomo ar loued  
War da rec'hel uhel ! »

« Keit ha ma teuio ar mor don  
Da grignat da rec'hel,  
Houman vezo bepred ma zôn :  
**Te 'vevo Breiz-Izel ! »**

« Nan na varvi ket, ma mam-vro,  
Pa 'teuz mibien fidel.  
A lamp o c'halon 'n o c'hreizo,  
O ma bro Breiz-Izel ! »

Ar rec'hel, gwir eo, 'zo debret,  
Mez war c'horre hepken ;  
Torret ar mean hag e welfet  
Eur galon yac'h ha kren.

Evel ar rec'hel ma bro Breiz  
'Zebtant mont d'ar maro,  
Mez n'eo ket 'velse en he c'hreiz,  
**Te a vevo, ma Bro !**

KALON-DIR.

---

# STIGN DA DELEN

---

D'am mignon hag amezek Kalon-Dir evit e zonik  
kentan « Ma Bro » kinniget d'in.

Eur steredennik a welan  
'Paouez sevel,  
Ha stum ganti c'hoantât lintran  
War Breiz Izel.

Eun tamm muioc'h a sklerijen,  
Dre ar mezio,  
Da verrât an devalijen  
Ewar ar Vro!

Eur mab a gresk evit difenn  
Enor e Vamm ;  
War dal Arvor eur berlezen  
A neve-flamm ! . . .

Da dolik-esa, Kalon-Dir,  
A zo mad-tre ;  
Losk warni hag e ri, en gwir,  
Treo a zoare.

Pe vouskan ken brao an evnik  
C'hoaz en e nez,  
Na dudiuz vo e zonik  
Pe nijo 'mez !

Mar zo banno en heol-veure  
O tispakan,  
Tarzan, broudan rei 'n e greiste,  
'Lein an oabl splan...

Gand an dir a zo 'n es kalon  
Gra eur c'hlenve,  
Da vrezellata, ma mignon,  
'Vit ar Gwir-Fe !

Eur c'hlenve a dolo luc'hed  
'Vel eun taran,  
Hag a skarzo an haillhoned  
'Glask hon flastran.

Pe zo ijin ha nerz-spered  
Eur barz 'n es kreiz,  
Kas prim da *Groaz ar Vretoned*  
Zonio eleiz

Zonio hag a reio tridal,  
'N o beio kloz,  
O sonjal en amzer gwechal,  
Hon zado koz.

Zonio hag a yelo dre-holl  
War an avel,  
Hag a skedo evel eun heol  
Dre Vreiz-Izel...

Stign da delen evit kanan,  
A beb eil tro,  
Ewar an tonio ar c'haeran,  
**Doùe... Ar Vro !!...**

Gab LISKILDRY.